

Miziad ar brezhoneg e Bro An Alre



01 > 31
03

2017



SADORN 04/03

Lenomp Asampl !

Un emgav e brezhoneg en-dro d'al levrioù ha pa vehent skrivet e brezhoneg, e galleg, e saozneg pe en ur yezh arall. Dait da ranniñ ho soñjoù hag ar blijadur ho peus bet é lenn ul levr.

10e30-12e, mediaoueg Brec'h, digor d'an holl evit netra. **Aozet get** Kerlenn Sten Kidna ha mediaoueg Brec'h.

Kontomp-diskontomp !

Selaouit, re vras ha re vihan, selaouit hag e klevehet ! Kontadennoù e brezhoneg get J-B Le Galloudec.

15e30-16e30, tavarn Le Cadoudal, An Alre, digor d'an holl evit netra. **Aozet get** Ti Douar Alre ha Kerlenn Sten Kidna.

SUL 05/03

Sonadeg

Ar strollad Ardarah hag al laz-kanal Chœur An Alre a ginnig deoc'h ur sonadeg. Doc'h ar programm : sonerezh a Vro Iwerzhon ha sonennoù e brezhoneg ! Adal **15e**, Chapelig ar Cham, Brec'h, a-vad, lod hervez pep unan. **Aozet get** Chœur An Alre.

LUN 06/03

Flashmob

Un emgav digor en-dro d'ar c'han àr marc'had An Alre. Digor d'an holl evit netra.

10e30-11e30 dirak stal La Trinitaine, ru al Laezh. **Aozet get** Ti Douar Alre ha Kerlenn Sten Kidna.



MERC'HER 08/03

Lennadenn divyezhek

Un emgav evit ar vugale etre 3 hag 11 vlez en-dro d'al levrioù e brezhoneg hag ar blijadur da selaou doc'h un istor lennet a vouezh uhel. **17e-17e45**, mediaoueg An Alre. Digor d'an holl evit netra. **Aozet get** Ti Douar Alre, Kreizenn Sevenadurel Athéna ha Kerlenn Sten Kidna.

Filajamp !

Soniñ a veg a blij deoc'h ? Lakait hoc'h anv ! **Filajamp !** eo anv un heuliad abadennoù a vez dalc'het ur wezh bep miz e ti an dud. Adal **20e**, evit gouiet hiroc'h ha lakaat hoc'h anv, pellgomzit d'ar 02 97 29 16 58. **Aozet get** Kerlenn Sten Kidna.

GWENER 10/03

Filaj

Ha bourriñ a rit é kanal pe é selaou doc'h ar re arall é kanal ? Dait 'ta d'an davarn Le Rendez-vous des chasseurs e Fetan-ar-bleuñv e Pleñver ! Adal **20e30**, digor d'an holl evit netra. **Aozet get** Ar Vammenn, Kerlenn Sten Kidna ha Ti Douar Alre.

SADORN 11/03

Bec'h d'al levrioù !

Ar gevredigezh Kendalc'h a ginnig deoc'h dizoloiñ foñs levrioù brezhonek o mediaoueg. **9e30-10e30** e ti Kendalc'h, digor d'an holl evit netra. **Aozet get** Kendalc'h ha Ti Douar Alre.



> SADORN 11/03

Hag ar gwenan ?

Predegenn kaset e galleg get Daniel Carré a-ziàr an dastumad lizherioù skrivet get Loeiz Herrieu d'e vaouez e-pad ar brezel bras. **10e30-12e** e ti Kendalc'h, digor d'an holl evit netra. **Aozet get** Ti Douar Alre ha Kendalc'h.

Sellit 'ta !

Diskouezadeg Lucien Pouëdras, un tañva ag ar vuhez pemdeziek àr ar maezou a-raok an eil brezel-bed. Abadenn kaset e brezhoneg. **15e-16e**, Ekomirdi St-Degan, monet a-barzh : 6€, digresket 3€. **Aozet get** Ekomirdi St-Degan.

SUL 12/03

Luduennig

Un arvest margodennoù e brezhoneg evit ar re vihan (hag ar re vras !) diazezet àr ur gontadenn-bobl, savet get Strollad Kallag. **15e-16e**, sal ar Vadalen, Pleuwigner, 5€. **Aozet get** Ti Douar Alre ha Kerlenn Sten Kidna.

MERC'HER 15/03

Ur wezh e oa...

Ul lennadenn kaset e brezhoneg get Jean-Claude Le Ruyet evit ar vugale etre 3 hag 11 vlez en-dro d'al levrioù e brezhoneg hag ar blijadur da selaou doc'h un istor lennet a vouezh uhel.

17e-17e45, mediaoueg Brec'h, digor d'an holl evit netra. **Aozet get** Mediaoueg Brec'h, Ti Douar Alre ha Kerlenn Sten Kidna.



YAOU 16/03

Predegenn : Ur sell àr brezhoneg Gwened

E brezhoneg bro-Gwened e kaver àr un dro stummoù-yezh kozh, stummoù tost doc'h ar c'hembraeg hag ar c'herneveureg, levezonioù roman, ha diforc'hioù diabarzh a vez lies abegoù dezhe. Perzhioù ar brezhoneg-se, e-lec'h er lakaat a-gostez èl ma vezer techet d'ober meur a wezh, er lak da vout ur parland brezhonek-tre hag ur c'hoashent yezhel a-bouez. Predegenn kaset e brezhoneg get Patrick Dréan.

20e, sal Sten Kidna, 6 r. Joseph Rollo, An Alre, digor d'an holl evit netra. **Aozet get** Kerlenn Sten Kidna.

SADORN 18/03

Deomp da vale !

Un droiad-bale kaset e brezhoneg get Patrick Dréan e Lokmaria-Kaer. A-hed ar valeadenn-mañ e vo klasket seblantoù an nevez-amzer, anavout gwell loened ha plant an arvor ha gober un tamm kompren d'ar vro dre vras (anvioù-lec'h ha tout). Hentoù aes. Emgav da **14e** dirak chapel St Fiakr e St-Per. **Aozet get** Kerlenn Sten Kidna.

SUL 19/03

Overenn e brezhoneg

Un overenn kaset e brezhoneg penn-da-benn get an Tad Jean Le Berrigaud.

11e, iliz St Per ha St Paol e Mendon. **Aozet get** Ar Vammenn get sikour Bodad an Eskopti evit ar brezhoneg.



MERC'HER 22/03

Unan, daou, tri, setu ma fri !

Ur penn-devezh e brezhoneg evit bugale Kreizenn-dudi Pleuwigner. Dañset, kanet ha c'hoariet e vo !
14e30-17e. Aozet get Kreizenn-dudi Pleuwigner ha Kerlenn Sten Kidna.

GWENER 24/03

Dorioù-digor er skolioù

Un toullad hentennoù divyezhek a Vro An Alre a ginnig d'ar gerent donet da zizoloiñ ar c'helenn e brezhoneg.
(Evit gouiet pe skolioù a vo digor d'an deiz-mañ, dait e darempred geneomp : 02 97 78 41 40).

SADORN 25/03

Dorioù-digor er skolioù

Un toullad hentennoù divyezhek a Vro An Alre a ginnig d'ar gerent donet da zizoloiñ ar c'helenn e brezhoneg.
(Evit gouiet pe skolioù a vo digor d'an deiz-mañ, dait e darempred geneomp : 02 97 78 41 40).

Stal-labour linograverezh

Un degouezh roet da bep hini da zeskiñ teknik al linograverezh.

14e-18e, sal an Tanin, Pleuwigner, digor d'an holl adal 14 vlez (8 plas e vo etre tout). **Aozet get** l'Art et l'Île ha Ti Douar Alre.
Lakait hoc'h anv a-raok an 18/03/2017 : oliertidouaralre@gmail.com.



> SADORN 25/03

Pred kanet

Friko kaol en asiedoù ha tud da ganal sonennoù brezhonek gete !

Adal **19e30**, sal Jean-Marie Goasmat e Malachap, Pleuwigner, 12 € (hep an evaj), 6 € evit ar re edan 10 vlez.

Aozet get Kuzul Skoazell Diwan ha Ti Douar Alre.

Lakait hoc'h anv a-raok an 18/03/2017 : oliertidouaralre@gmail.com.

MEURZH 28/03

Sine-kleub : Mon lapin bleu / Al lapin a c'haloup bepred

Daou deulfilm bet savet get ar skrivagnour Gérard Alle a-ziàr ur vaouez, Yvonne hec'h anv, bet é terc'hel un ostaleri e-pad 30 vlez en ur gêriadenn vihan e Penn-ar-Bed, Poulldreuzig. Lec'h nemetañ an teulfilm kentañ (bet savet e galleg) eo **Al lapin bleu** just a-walc'h, an davarn e-lec'h m'eo bet ganet ar vaouez 80 vlez 'zo. **Al lapin a c'haloup bepred**, an eil film savet e brezhoneg (istitlet e galleg), hor c'has d'ar mump lec'h 4 blez àr-lerc'h. Emañ Yvonne àr he leve. Ranniñ a ra hec'h envorennoù get Yann Bijer.

Da heul ar filmoù e vo ur prantad eskemm e brezhoneg get Yann Bijer, ar skrivagnour ag ar vro vigouden.

20e30, 6,50€, 4€ evit ar re edan 14 vlez, Ti Hanok, An Alre. **Aozet get** Ti Hanok ha Ti Douar Alre.

MERC'HER 29/03

Deomp d'ar mirdi

Un digarez da welet un diskouezadeg, d'en em soñjal ha da eskemm e brezhoneg a-ziàr labour an arzourion.

15e-17e, Mirdi Ar C'hohu, Gwened, 2,90€. **Aozet get** Ti Douar Alre ha Kerlenn Sten Kidna.



YAOU 30/03

Kanomp uhel !

Dorioù-digor Chœur An Alre : un digarez da razh ar re a zo tomm doc'h ar c'han ha d'ar c'han e brezhoneg da zonet da welet labour al laz-kanal e-pad ur bleustradeg digor d'an holl.

18e30-20e15, skol gozh Joseph Rollo, An Alre. Digor d'an holl evit netra. **Aozet get** Chœur An Alre.

GWENER 31/03

Lamm d'ar roue !

Un noziad evit c'hoari en-dro d'an daol, barbotal e brezhoneg hag evet un tasad en ul lec'h degemerus. Adal **20e30**, Bal Breton, Brec'h. **Aozet get** Ti Douar Alre ha Kerlenn Sten Kidna.

A-HED AR SIZHUN

Abadennoù tañva d'ar brezhoneg

Un abadennig evit an nann-vrezhonegerion c'hoant gete deskiñ lâret un toullad traoù diazez e brezhoneg : saludiñ, en em brezantiñ, kimiadiñ, kontiñ betek 10, digor d'an holl evit netra. **Aozet get** Ti Douar Alre.

- d'ar merc'her 01 a viz Meurzh, **14e30-15e30**, sal ar Voulien, An Drinded.
- d'ar merc'her 08 a viz Meurzh, **14e30-15e30**, mediaoueg Le Courtil, Lokoal-Mendon.
- d'ar merc'her 15 a viz Meurzh, **14e30-15e30**, sal ar gouelioù, An Intel.
- d'ar merc'her 22 a viz Meurzh, **14e30-15e30**, sal ar gouelioù, Plunered.
- d'ar merc'her 29 a viz Meurzh, **14e30-15e30**, sal liesimplij, Pluvergad.



Kafe, bara-amanenn

Kafe da evet, bara-amanenn da zebriñ ha tud da varbotal gete e brezhoneg !

14e30-16e30, sal an Tanin e Pleuwigner. Digor d'an holl evit netra. **Aozet get** Kerlenn Sten Kidna.

- d'ar gwener 10 et 24 a viz Meurzh, **14e30-16e30**, salle du Tanin à Pluvigner.

Abadennoù kaozeal

Un digarez d'en em dolpiñ da gomz e brezhoneg a-ziàr traoù a bep seurt : an doerieoù, ur skeudenn, un ton ha c'hoazh !

Digor d'an holl evit netra. **Aozet get** Kerlenn Sten Kidna.

- d'ar meurzh 14 a viz Meurzh, **16e30-18e**, salle Sten Kidna, 6 r. Joseph Rollo à Auray.
- d'ar gwener 17 a viz Meurzh, **15e30-16e30**, Tavarn le Ty Bouchon, Plarnel.

Abadennoù tañvat d'ar yezh er skolioù

Da razh ar skolioù divyezhek a Vro An Alre eh eus bet kinniget abadennoù tañva d'ar yezh, kement ha roiñ un digarez d'ar vugale da dostaat doc'h ar brezhoneg evit ar wezh kentañ evit ul lodenn vras anezhe. Ur skipailhig animaterion a yay da gas abadennoù tañva d'ar yezh er skolioù o deus er goulennet. **Aozet get** Ti Douar Alre ha Kerlenn Sten Kidna.

Pennadoù en ho kazetennoù

Bep sizhun e vo kavet e-barzh ho kazetennoù pennadoù é tenniñ d'ur ger peotramant d'un droienn vrezhonek. Un digarez eo da zeskiñ traoù ha da binvidikaat e yezh. Bep gwener e vint embannet er Ouest-France ha bep sadorn en Télégramme.



Sinema e brezhoneg evit ar vugale



15^{vet} troiad Daoulagad Breizh : e Ti Hanok en Alre hag er Greizenn Sevenadurel Terraqué e Karnag e vo kinniget filmoù-bevaat e brezhoneg d'ar vugale skoliataet en hentennoù divyezhek ha Diwan e Bro An Alre. Doc'h ar skramm : **Mab ar Groufalo** evit ar re vihan hag **E barr uhelañ ar bed** evit ar re vras.

DA VOUT KAVET E STAL AR BOSER

3 500 skouerenn ag ur c'harnedig get frazennoù ha gerioù talvoudus da vout implijet e stal ar boser 'zo bet embannet da geñver **Miziad ar brezhoneg**. Moaien 'vo deoc'h o c'havout e razh stalioù ar voserion àr Zouar Alre. Evit bout ur skouerenn e c'hellit ivez tremen dre vurevioù Ti Douar Alre e Pleuwigner (11 ru an Tanin) pe dre sal Kerlenn Sten Kidna (6 ru Joseph Rollo).

Ti Douar Alre, 11 ru an Tanin, 56330 PLEUWIGNER.

02 97 78 41 40, degemer@tidouaralre.com

WWW.TIDOUARALRE.COM

